


EMSAV



KELAOUENN BOLITIKEL

MIZIEK

Niv. 32 - Eost 1969

An niverenn : 2,00 F

Koumanant-bloaz : 20,00 F

Deraouiñ a ra ar c'houmanant e miz Genver

EMSAV

30, Place des Lices, 35 - RENNES

C.C.P. RENNES 2 460 10

T a o l e n n

Unvanadur an istoregezh	p. 231
Demokrategezh ha frankiz-dezeviñ	p. 237
"Petra ober ?" (arroud); "Danevelloù 1964 S.A.D.E.D." (arroud)	p. 240
An Emsav hag ar Vro (17) [EMVR-89 - 95]	p. 241
Lizheroù p.241; Danevelloù obererezh : Emvod hollek S.A.D.E.D. e Mur d'an 3 Eost 1969 p. 246.	
Notennoù politikel (7), Framm al levierezh. II.- Ar frammoù fetis	p. 247

UNVANADUR AN ISTOREGEZH

E Mae 1967 ez embanne Emsav : "Evel ma ranker bezañ deskad war ar yezh, e ranker ivez bezañ deskad war an Emsav : ur vicher eo da gentañ an Emsav, rak ar pezh a zesker da gentañ evit bezañ emsaver n'eo ket mennoziou met un ober. Deskiñ a reer an Emsav evel ober dre e zeskiñ evel Istor" (1). E 1967 e oa ar brezhoneg danvez a zeskad-urezh emsavel. An Istor avat ne oa ket, - an Istor en e ster klok, e kement ha ma'z eo gwrizienn an ober. Moarvat e oa bet graet studiennoù e-leizh war Istor Breizh hag an Emsav, hag embannet prederiad-ennoù politikel, - heñvel e oant ouzh ar pezh a veze kavet war dachenn ar yezh a-raok hec'h unvanadur, eleze imbourc'hioù a yezhoniezh. Ken dic'hallus e oa ren e 1967 un ober politikel brezhon-gant an dafar istorel a neuze ha ma vije bet e 1900 kemer ar brezhoneg da yezh vroadel gant dafar yezhel ar mare.

En hevelep doare ma ranke ar yezh bezañ unvanet evit adkemer he roll e buhez ar vro, e ranke ivez an istoregezh bezañ unvanet evit bezañ diazez ar vuhez politikel. E 1969 eo bet kaset da benn unvanadur an istoregezh vrezhon. Eeun eo ar pennaennoù a gaver e disoc'h an unvanadur-se : kefridi an Emsav zo adempañ ar vro; kefleuniañ a ra e gefridi dre vezañ framm brezhon dispac'hel; roll ar framm brezhon dispac'hel zo distrujañ ar framm sujer ha kemer e lec'h. Diwar ar pennaennoù-se e vez dezrannet pep darvoud ha kemeret pep diviz. Stummadur an emsaver a varner evel e varregezh da ren e anaout hag e ober diwar ar pennaennoù-se.

N'eo ket a-walc'h anaout disoc'hoù eeun an unvanadur. Istor an unvanadur e-unan zo da vezañ studiet. Amañ e roimp un darn anezhañ : heuliañ a raimp an argerzh-unvaniñ a-dreuz d'an Devezhioù Studi aozet gant E.S.B..

Evel a ouzer ez eo da Bask 1965 e voe aozet evit ar wech kentañ

an emvodoù politikel a zlee dont da vezañ an Devezhioù Studi da c'houde. E miz Du 1967 e voe embannet un dezrann kentañ eus al labour dindan an titl : Perak Devezhioù Studi Politikel ? (2).

E Du 1967 edo c'hoazh ar gelennadurezh war ar stern. Brastreset ne oa ken damkaniezh ar framm; kefridi an Emsav evel adempren ar vro ha roll bellourel ar framm ne oant ket termenet c'hoazh, - savelet oa al ledemsav, hogen dispis e chome e lec'h en daelerezh-dieubiñ, - ken ma oa dic'hallus n'eo ket hepken stagañ gant un ober foran, met reiñ ur ster emsavel d'un niver mat a zarvoudoù, da heul, kemer divizoù heboell, ha kenkoulz-all barn ergorek stummadur an emsaverion.

Anat oa an diglokted-se war furm an Devezhioù Studi. Betek 1968 e voe aozet ar re-mañ evel ur gejadeg kefredourion. Kouviet e veze kelennerion ha prezegennerion anavezet dre o gouiziegezh levrek war dachennoù o tennañ a dost pe a bell d'an Emsav : hanez, lennegezh, armerzhouriezh, politikouriezh, h.a.. War un dro e veze pedet kement deskad war ar brezhoneg a c'halled tizhout.

Ne c'houlenned ket digant ar gelennerion bezañ emsaverion, met bezañ barrek d'ober displegadennoù e brezhoneg. Dav eo lavarout evelkent ne beded da gelenn nemet tud a selled evel emsaverion. Hogen dangorek e oa seurt priziadur eus an emsaveriezh pa na gemere sol war azon gwiriadus ebet. An Emsav o vezañ repueta abaoe 1945 er "stourm sevenadurel", ne c'halled anaout an emsaveriezh nemet diwar azonoù ameeun pe arouezel evel arver ar zh, desav ar vugale e brezhoneg, h.a.. Evit ar peurrest e ranked barn an dud diwar o mennozioù ha n'eo ket diwar o oberoù, - splannañ merk eus an dibolitikaat hag eus an diouer a emouiziegezh a reuzie c'hoazh en hon touez.

Digant an deskidi ne c'houlenned ket kennebeut-all bezañ danvez emsaverion. Da warantoù eus o danvez emsaveriezh e spire o youl da zeskiñ ar yezh hag o bezañs en Devezhioù Studi.

Da heul, e vire labour an Devezhioù Studi un neuz akademek, re heñvel ouzh hini forzh petore "kamp a vrezhonegerion". N'eus nemet ar c'hentelioù brezhoneg kentañ derez a veze aozet hag erounezet en un doare framet gant kefridiaded wirion. Kerkent avat ha ma tremened

war dachenn ar stummadur politikel e-unan e kouezhed e domani an hiniennelouriezh. Degemeret e veze war ar roll-kelenn hogos forzh petore danvezioù, forzh petore doareoù da bleustriñ warno. Edod o paouez freuzañ mojenn ar brezhoneg sellet evel doare emgefreak da zont d'an Emsav. Ent devoud e vired pal ar "c'hampoù a vrezhonegerion", eleze embreger yezherion. Evit an amkanioù politikel, e teuent war ar marc'had.

Koulskoude, e Devezhioù Studi Kerzu 1968 e voe gwelladur. Pledet e voe a-hed an amzer gant danvezioù politikel. Anatoc'h a se avat en em ziskouezas an namm hiniennelour hag an disklotadurioù etre an damkaniezhoù displeget. Klasket e voe en em ober ouzh an droug, da gentañ dre welout en disklotadurioù-se diforc'hioù etre personelezhioù : erbedet e veze o gouzañv en anv ar frankiz-dezeviñ. E gwir, ne oa ket poanius an aberzh goulennet pa na gemere pouez fetis ebet, - er par akademek e chome an displegadennoù. Nemet e kroged da verzout ne ve biken tu da vont war an dachenn foran keit ha ma ve ken disklotus an damkaniezhoù e diabarzh E.S.B.. Aozet e voe kendaelioù a-benn kompezañ an dizemglevioù, ha na ouejont nemet merkañ fraeshoc'h an enebadurioù. Un enkadenn ne oa ket, gwashoc'h : ur sac'hadenn, un hent-dall.

Tri lod a oa e poblañs E.S.B. dirak ar sac'hadenn : al lod kentañ a dremene hep he merzout, - ken heñvel oa an traoù ouzh ar pezh a welent e pep lec'h e Breizh ma ne oa evito netra nemet natur; a viskoazh o doa gwelet an Emsav sac'het : hag un Emsav e vije c'hoazh an hini na vije ket sac'het ? An eil lod a wele ar sac'hadenn, hag a asante dezhi evel d'un devoud ret, - n'eus netra peurvrat er bed-mañ ! - muioc'h c'hoazh, a rae anezhi ur rakgwarant eus an demokrategezh a zo da ziazezañ e Breizh. An trede lod a wele ar sac'hadenn, ha n'he degemere ket : he dezrannañ a rae.

Hag an dezrann a lakaas a-wel an arbennoù anezhi :

- Dic'hallus e oa c'hoazh kinnig kelennadurezh an Emsav en ur furm gevan. Da heul, frouezhioù darnel an imbourc'hioù ne c'hallent kavout lec'h en deskadurezh nemet o tont war un hevelep renk gant damkaniezhoù

all danzeet er-maez eus an Emsav hag estren dezhañ. N'eo ket e kelennadurezh an Emsav enta edo an disklotadurioù, met en diavaez anezhi, etrezi ha damkaniezhoù estren, pe etre an damkaniezhoù estren o-unan.

- An dud stummetañ evel emsaverion ne oant ket dre ret ar re ouestañ d'ober kentelioù. Diasur e choment dre ma chome digevan kelennadurezh an Emsav ha, dre-se, diechu o stummadur, ha ne gredent ket goulenn evit ar pezh o doa da lavarout kemer al lec'h kentañ pe al lec'h nemetañ er c'helennerzh. E-se e oa dilañset div wech ar gelennadurezh emsavel en Devezhioù Studi, ha gwashaet c'hoazh neuz ar meskailhez a veze servijet d'an deskidi. Ken ma tegouezhed gant ar saviad amoet-mañ : deskadurezh an Emsav a gemere diazez damkanel er-maez eus an Emsav dreist-holl.

Da freuzañ e oa ar sac'hadenn. Ne c'halle bezañ freuzet nemet diwar-bouez un eilpennadur o lakaat an Emsav war e dreid. Kaset eo bet kelennadurezh an Emsav d'he furm gevan, hag an Emsav a gemer hiviziken diazez war e gelennadurezh.

Meur a hent zo da zeskrivañ an eilpennadur-se. Henn ober a raimp amañ oc'h arverañ ar meizadoù savelet er studienn war ar framm (3).

Kement ober emsavel a gomprenner evel ur strivad da walc'hañ un ezhomm gouzañvet gant ar bobl vrezhon en he dangorelezh. C'hwitadennoù e voe en un doare kement strivad hon eus anavezet betek-henn : n'eo ket kement peogwir ne oa ket bastus ar gwalc'hadur nag an ergoreladur kaset da benn drezañ, met dreist-holl peogwir ne dalvezas ket an ergoreladur-se da benn-pont da ergoreladurioù nevez. Namm ar strivadoù emsavel kent ne voe ket bezañ bet darnel, met bezañ chomet darnel ha bezañ bet distrujet hep luskañ un argerzh-aloubiñ eus maeziad an ezhommelezh vrezhon. Breiz Atao zo bet un derou a ergoreladur eus an ezhommelezh vrezhon; Gwalarn ivez, ha war un tolead disheñvel; met nag an eil nag eben n'o devoe en o c'herz ar benveg en dije roet dezho an tu da astenn d'an ezhommelezh vrezhon a-bezh ar gwalc'hadur hag an ergoreladur a renent war an daou dolead o doa savelet. Distrujet e voe an daou benn-pont, hag int krouet a briz bras koulskoude, hag an ezhommelezh vrezhon a adkouezhas e par an dangorelezh.

Pa lavaromp ez eus bremañ ur gelennadurezh emsavel, e fell dimp lavarout evel just ez eo gouest an Emsav da dermenañ fraezh e amkanioù ha da savelañ e vellouriezh; met dreist-holl, mard eo gouest d'ober kement-se, ez eo peogwir emañ en e gerz bremañ ar binvioù a vanke d'e ziaraogerion. Ar binvioù-se a ro dezhañ an tu

a) d'en em anaout evel argerzh istorek b) d'en em ziazezañ evel framm dispac'hel war an dachenn k) da zezrannañ, ken e gouloù e istoregezh, ken e-keñver ampegadoù an dispac'h, kement embreger-ezh ha kement damkaniezh oc'h anadiñ ennañ e-unan pe en diavaez anezhañ.

Kerse eo ganimp dipitañ ar geneiled a zo bet mibilius a-walc'h evit prestañ dimp ar mennad da embann kelennadurezh an Emsav evel ur wirionez peurbadel. Hep mar e kemer ar gelennadurezh he diazez donañ war an damant d'ar wirionez, met na ankouaomp ket ez eo an Emsav un aozadur-brezel hag ar gelennadurezh ur benveg-emgann, eleze ur benveg-distrujañ. Roll ar gelennadurezh zo dezrannañ kement tra a vez graet e Breizh ha luskañ an distruj eus kement tra, damkaniezh pe embreger-ezh, na gas ket, pe na gas ket mui, an Emsav d'e bal.

Armoù diouto a gav ar geneiled-se gant an arguzennoù torkulet o deus graet c'hwitadenn an Emsav kozh. Chouaned int, na mui na maes, o hejañ filc'hier enep an tankoù hag an nijerezed. Diziouerus eo kaout an armoù a glot gant an emgann a venner ren.

Un dra all a ouzomp : pouez an armoù zo pouez ar vuhez a lakaer enno. Evel pep klav-brezel, ned eo ar gelennadurezh netra hep ar galonegezh.

Prouenn gentañ efedusted ar gelennadurezh eo bet he diazezadur : rak en em ziazezet he deus hervez an argerzh termenet ganti evel an argerzh-diazezañ emsavel. Diwar ar penn-pont e voe unvanadur ar yezh ha krouidigezh framm an deskadurezh vroadel en deus an Emsav gounezet tachadoù nevez a zo unvaniñ e istoregezh, kevanaat e gelennadurezh hag en em ziazezañ da vat evel framm dispac'hel. Ar gudenn manet e-maez gwel Breiz Atao ha Gwalarn, hini kresk ar framm fetis a-dal da vaeziad an ezhommelezh (4), zo bet war un dro termenet ent damkanel ha diskoulmet e-ser un embregadenn fetis.

Diazezidigezh an Emsav war e gelennadurezh, freuzidigezh ar sac'hadenn ma edo unan eus e aozadurioù-stummañ, a gas d'o heul treuzfurmadoù don e doare an Devezhioù Studi end-eeun. Er c'heñver-se o deus bet Devezhioù Studi an hañv 1969 talvoudegezh ur gwilioud : e furm emsavel o deus roet d'ar stummerezh.

Betek 1968 ne oa unvan en Emsav nemet ar yezh. Diwar an unvanded-se e voe tu da ren un ergoreladur kempoell : krouidigezh S.A.D.E.D. e 1962, K.D. e 1965 a zisoc'has en ur c'helennerezh emsavel, frammet disi, eus ar brezhoneg. Anataet e voe kement-se dre an Devezhioù

Studi : ne oa frammet-strizh nemet ar rann anezho o plediñ gant ar stummadur war ar yezh, tra ma chome digempoell ha laosk ar rann a oa fiziet enni ar stummadur politikel. Eeun eo arbenn gwirion an digemp-ouez-se : unvanet e oa ar yezh, tra ma ne oa ket unvanet an istoregezh. Ne oa ket unvanet an istoregezh, ne oa ket kevanaet ar gelennadurezh, ha ne ouie den petra oa ar stummadur politikel : penaos frammañ un aozadur-stummañ pa na ouzer ket petore stummadur a zo da reiñ ? Adalek ar mare ma'z eo unvanet an istoregezh, er c'hontrol, n'eo ket diaesoc'h kelenn an istoregezh unvan ha ma'z eo kelenn ar yezh unvan.

Un treuzfurmadur heñvel zo da gavout e stuz ar "gelennerion". Evel ma empleg ar gelennadurezh ar varregezh da zebrannañ pep kelennadurezh, ez empleg ar stummadur ar varregezh da stummañ. Aes eo merzout an islonk a zo etre ar c'helenner giz "kamp a vrezhonegerion" hon eus anavezet en Devezhioù Studi betek 1968 hag an emsaver stummet stummer emsaverion.

Hiziv e verzomp pegen truezus e oa stuz hor "c'helennerion". Seul grisoc'h e c'hellomp e varn ma oa anezhañ n'eus ket pell c'hoazh stuz an emsaverion stummetañ.

Forzh piv, gant bezañ heuliet an deskadurezh eil derez gall ha desket brezhoneg, a c'halle bezañ kelenner. A stummadur, keloù ebet. D'ar muiañ, ar mouladur degemeret e riboul ar skol c'hall. War ar mouladur-se, anv ebet d'ober un dezrann eus ar seurt ez eo gouest tud stummet da ren, - an deskadurezh c'hall a daol evezh mat da chom hep stummañ an dud na vint ket sternioù-diazez ar vro, - e touged hepken ur gwiskad a "vennozioù brezhon", mesket diouzh an dro gant "mennozioù" sokialour, frankizour pe kristendemokrat, ken distumm ha ken diefed an eil re hag ar re all...

Kentañ tra o deus graet an emsaverion eo kas warno o-unan an dezrann a roe dezho ar gelennadurezh an tu d'ober, an dispenn eus seurt stuz arallekaet hag an adsav diouzh poellelezh an Emsav na oufe bezañ a emsaverion heptañ.

-
- (1) Sl. An Emsav evel Ober hag evel Istor, Emsav 5/105 1967.
 - (2) Sl. Emsav 11/287 1967.
 - (3) Sl. Petra eo ar Framm ?, Emsav 14/33 1968.
 - (4) Sl. Penaos e kresk ar framm, id., ibid. /38.

DEMOKRATEGEZH HA FRANKIZ-DEZEVIÑ

Unvanadur an istoregezh (1) hag ar frammadur politikel sevenet d'e heul o deus lakaet tri rumm da anadiñ en E.S.B. : a) an izili a zo bet micherourion an unvanadur ha, war un dro ganto, ar re o deus tennet diouzhtu o mad eus an hentennoù-dezrannañ neveztermenet b) an danvez emsaverion k) ur rumm-etre, o c'hoarvezout eus tud sellet evel izili, hogen o tiskouez bezañ divarrek c'hoazh da arverañ an hentennoù-dezrannañ.

Gant tud an trede rumm e sav diaester, n'eo ket gant an holl evelkent. Mar boent sellet evel izili en ur mare ma rae diouer an hentennoù ret da briziañ ar stummadur, e voe ur fazi moarvat; ken aes eo merzout ar fazi-se hiziv ha ma oa diaes neuze. Ar pezh o deus d'ober tud an trede rumm eo anaout ar fazi graet en o c'heñver gant o asant ha difraeañ d'e reizhañ dre c'hounit ar stummadur n'o deus ket. Ha setu ar pezh a ra un darn vat anezho, n'o deus nemet ur youl : kemer renk er rumm kentañ.

Reoù all avat a ziskouez enebiezh ouzh an treuzfurmatur c'hoarvezet, a nac'h degemer an hentennoù o deus roet tro da ziskuliañ skorted o stummadur. N'eus aze nemet un darvoud dibouez a-walc'h, rak tonket eo n'eus forzh penaos an trede rumm da vont da get buan dre an eil tu pe egile. Ne dalvezje ket ar boan embann ur pennad war e zivoud ma n'o dije ket an nagennerion hejet banniel an demokrategezh evit difenn o c'haoz, o reiñ dimp dre-se an tu da fraeshaat hor mennozioù war ar c'heal-se.

Goulenn a reomp : hag an demokrategezh eo lakaat an danvez emsaverion da grediñ ez int barrek da gemer disentezioù war bolitikerezh an Emsav, - int-i hag o deus da zeskiñ c'hoazh petra eo ar politikerezh ha petra eo an Emsav ? Seurt galloud-divizout ne oufe bezañ nemet ur c'hoariell dañjerus etre o daouarn, ha nac'h a zleont he c'hemer mard int fur. Ha koulskoude, lakaet e voe ar c'hoariell-se

etre daouarn danvez emsaverion er mizioù tremenet. Ur fazi e voe, anat; zoken a-raok ma voe kaset da benn an dezrannadur politikel hollek, e oa prouennoù a-walc'h eus ar fazi e oa : n'eus nemet kounañ an tezennoù enebmsavel a voe ret mouezhiañ war o divoud da heul eurvezhiadoù arguerzh a-benn prouiñ d'an deskarded o difenne e oant enebmsavel. An deskarded-se, hiziv pa denner ar c'hoariell a-dre o daouarn, a gomz eus enepdemokrategezh.

Petra eo enta an demokrategezh en un emsav dispac'hel ? Pe ziazez he deus ? Ar fiziañs leun etre an izili. Ar pezh a laka an danvez emsaver da gemer renk e-touez an emsaverion eo kresk ar fiziañs o deus ar re-mañ ennañ. Harpet eo evel just ar fiziañs-se war azonoù ergorel, met ur fazi e ve diwelout an nerzh dangorel ez eo ivez. Diouzh an tu all, ne c'hell darempredoù demokratek bezañ etre an danvez emsaverion hag an emsaverion nemet war ziazez ar fiziañs o deus an danvez emsaverion en emsaverion. Ne c'hell den dont d'an Emsav en ur vegañ disfiz ouzh an emsaverion.

Arguzenn a vez graet ivez gant frankiz ar mennozioù, gant ar frankiz-dezeviñ. N'eo ket un dodenn nevez e Breizh. Pa voe unvanet ar yezh e savas ivez skrivagnerion evit difenn ar frankiz d'he skrivañ evel ma karent. A-raok ma voe unvanet an istoregezh e oamp holl techet da zifenn ivez ur furm a frankiz-dezeviñ a oa ar gwir da soñjal ha da lavarout n'eus forzh petra. Ar frankizouriezh-se a veize an dezeviñ, ar mennozioù, evel ur galloud hiniennel distag diouzh pep istoregezh, eleze kenkoulz diouzh pep poell evel diouzh pep ober.

Meizañ a raemp an dezeviñ evel distag diouzh pep poell. Ne renemp dezrann ebet war hon mennozioù na war mennozioù an dud all ha dre-se ne oamp evit o savlec'hiañ e nep poellelezh nag e nep istoregezh. Evit difenn hon "frankiz" ez aemp betek nac'h pep kendiviz kentoc'h eget klevout an dezrann eus hon emzalc'hioù. Heñvel oamp ouzh tud kouezhet er mor a laka o holl breder da stankañ o fri kentoc'h eget klask neuñ.

Da heul seurt izilded ez eus bet pistriet rummadoù a-bezh a emsaverion gant ur preder estren na oa den evit e zizarbenn dre

ziouer a vinvioù-dezrannañ. War un dachenn all, e voe bloavezhioù-pad lezet klañvourion da hadañ tabutoù amoet ha skoilhus en Emsav, pa vije bet a-walc'h gant un dezrann bredoniell eeun evit dieubiñ spered an emsaverion diouzh an amoedigezh o skoilhe.

N'eus ket a frankiz-dezeviñ hep an dlead da glask bepred ar poell eus an dezevoù. En diboellegezh ne c'hell bezañ frankiz ebet.

Meizañ a raemp an dezeviñ evel distag diouzh pep ober. O vezañ ma ne zifourke kentelioù, prezegennoù, tezennoù an dezevourion e oamp war ober politikel fetis ebet, e troe an dezeviñ en ur c'hoari mennozioù dizañjer. Dizamant e c'halle forzh piv difenn forzh petore tezenn. Ar pal ne oa ket trec'h an Emsav ken, met ar brud lennegel. Klask a raed bezañ anavezet evel skrivagner bras, komzer mat, meizour soutil, nevezour ar preder brezhon.

War an dezeviñ a oa hon hini neuze hon eus anavezet azonoù an hevelep diempradur a vrein hor bro : troc'het oa hor mennozioù diouzh pep poell evel diouzh pep ober. Seul zieupoc'h omp oc'h embann an dezrannadur-mañ m'hon eus e renet warnomp hon-unan. Ne vimp ket teneroc'h a se avat ouzh an nagennerion a nac'h ober kemend-all hag a zifenn ar gwir da skignañ mennozioù diempret en Emsav. An dezeviñ diempret-se ne anavez an Emsav frankiz ebet dezhañ. Argaset e rank bezañ, evel frouezh an arallekadur hag un hadenn a arallekadur nevez.

Kefridi an Emsav zo adempañ an dezeviñ hag ar poell, an dezeviñ hag an ober, - e gerioù all, adempañ ar preder brezhon hag an istor-egezh vrezhon.

Petra eo adempañ an dezeviñ hag ar poell ? Ne c'hell bezañ nemet an dezrannañ renet war gement emzalc'h, mennad pe zamkaniezh a-benn lakaat a-wel o foellelezh hag ar c'heñver etrezi ha poellelezh an Emsav (2).

Petra eo adempañ an dezeviñ hag an ober ? Bez' ez eo meizañ bepred ar mennozioù evel un ober pe ur rann ober oc'h engouestlañ tonkad an Emsav. Piv a gred kaout ar gwir da lavarout ar pezh a gar pa vez buhez tud e dalc'h e lavar ? Poent e oa d'an emsaverion merzout ez eo al lavar politikel un arm, ken dañjerus evit an hini

en embreg hag evit an hini a vez tizhet gantañ. Ne c'hell bezañ a frankiz-dezeviñ e-maez eus bevennoù ar frankiz-ober.

E meur a lec'h ez eus bet tro da dermenañ an Emsav evel un ober (3). Da gompren eo evel-henn : n'eo ket peogwir ez eo graet gant un emsaver ez eo emsavel un ober, met, en tu-gin, ez eo peogwir e reer oberoù emsavel ez eur emsaver. Ha penaos barn hag emsavel eo un ober nemet o kaout en hor c'herz muzul an emsavelezh : ar framm brezhon en e istoregezh hag e boellelezh fetis. N'eur evit barn emsavelezh un ober nemet mar bezer engouestlet korf ha spered er framm brezhon. Reizh eo e ve an danvez emsaverion damantet d'o frankiz. Ha mat eo ez afent, kent tonkañ o buhez, da gaout ar re a bouez frank yev an Emsav war o choug ha da vuzuliañ led an erv ma embregont o frankiz, - ha da verzout, mard eus e Breizh tud en o rezid, ez eo ar re-se (4).

(1) Sl. Unvanadur an Istoregezh, Emsav 32/231 1969.

(2) Sl. Poellelezh an Emsav, Emsav 30/163 1969.

(3) Sl. Penaos anaout an Emsav war an dachenn, Emsav 7/168 1967

(4) Sl. Danevelloù 1964 S.A.D.E.D., Klozadur 7.Kel-14/16-19 1965.

"Ur fazi bras eo krediñ ez afe izili ar framm dispac'hel e-maez reolerezh war zigarez ma'z eo dic'hallus ren ur reolerezh demokratel gwirion : an izili, evit gwir, n'o deus ket amzer da soñjal e furmoù bugel an demokrategezh (demokrategezh e-kreiz ur bodad bihan a geneiled o deus ar glokañ fiziañs an eil re er re all), hogen ur skiant lemm-kenan o deus eus o atebegezh, pa ouzont a-hend-all dre skiant-prenet ne gilo ur framm dispac'herion wirion rak hent ebet evit en em zizober diouzh un ezel displead."

LENIN, Petra ober ?, Diletantegezh dornwezhel an armerzhelourion ha frammadur an dispac'herion, 1902.

"Ar re a labour da vat er Strollad o deus nebeutoc'h a frankiz. N'o deus spi ebet da gaout muioc'h kent pell. Bep ma kresko ha ma startaio ar framm a-benn ar striv garv a roio he Stad rez da Vreizh, e kollo pep strivour nevez kalz eus e frankiz. ()

"Ar geneiled a zeu da zalc'hioù labour S.A.D.E.D. a oar pegement e vez doujet d'an den gant ma ve an den gwirion e-keñver e gumuniezh. () Al liamm etre izili hor strollad n'eo ket ul liamm a vignoniezh. Evit an abeg ma n'eo ket hiniennel, ha pa na c'hell ket padout pelloc'h eget gwirionded an dud. E gwir, hev-elep liamm n'eo ket disheñvel diouzh ar framm. Ar framm eo."

Danevelloù 1964 S.A.D.E.D., Klozadur, 7.Kel-14/18 1965

A N E M S A V H A G A R V R O (1 7)

LIZHEROU

"Emzalc'h K a zegas kudenñ an dud a zo bet desavet en un tiegezh "emsavel". E Y hon eus ur standilhonañ mat eus an dud-se ha tu zo da welout buan e sav aes-tre kudennoù ganto pa na sav ket kudennoù gant ar re all. Un dezrann a vefe da ober eus emzalc'h ar "gwim" deuet bras. Da'm menoc ez eo pouezus-bras an dezrann-se. N'eo ket pouezus hepken evit diluziañ kudennoù a anavezomp bremañ hogen evit lakaat a-wel en un doare fetis ha skouerius petra eo an Emsav, pere eo an hentoù a gas dezhañ, petra eo al ledemsav ha penaos ez anavez an emsaverion o emsavelezh. En ur par pleustrek e oufemp marteze penaos en em gemer gant bugale an "emsaverion"."

(16 07 69) EMVR-89

E/EMVR-89. - A-bouez eo evezhiadennoù hor c'henskriver, ha n'eo ket hepken evit anaout ha diskoulmañ kudennoù ar gwim, met evit lakaat an dud e Breizh da gejañ ouzh an Emsav. Ur stadadenn a c'hell ober ar gevredadourion e Breizh ez eo started al liammoù e diabarzh an tiegezh. Da heul dispennadur ar vuhez kevredigezhel, o deus Breizhiz kilet ha diazezet talbenn o c'hedvuhez e par ar familh, - menoc zo bet eus se c'hoazh war Emsav 21/277. Dav eo derc'hel kont eus an anadenn-se e Breizh dre vras, hag e tiegezhioù an emsaverion ivez. Ivez ha seul vuioç'h a se, dre an arbenn m'o deus tiegezhioù an eil Emsav ha derou an trede bevet en ur meni geto. Seul greñvoc'h a se e voe al liammoù ebarzhtiegezhel m'o doa an tiegezhioù emsaverion distaolet ar gevredigezh o c'helc'hie ha ma cant mui pe vui distaolet ganti, - "ni zo estrenion en hon bro" eo ar frazenn a zeue alies ganto. Dezrannet eo bet hevelep "kemplezh a'r gataregezh" gant Emsav 3/54 1967 dindan an titl Enkadenn ar bloavezhioù pemont.

Evit distreiñ d'ar gwim ez eus tu da venegiñ un nebeud e-touez o c'hudennoù dibarek. Anv a c'haller ober eus an diaesterioù o devoe evit kas da bennvad emdroadur-bred o c'hrennoad, - ar prantad-se end-eeun ma rank an den yaouank pellaat diouzh ar weledigezh vugelel, tiegezhel en deus eus ar bed, ha dreist-holl diouzh ar skeudenn gehelel en deus eus e dad, evit furmiñ ur weledigezh gouroadel, ergorekoc'h eus pep tra, ha lakaat e-lec'h skeudenn e dad tud-skouer nevez savelet diwar an darmpredoù kevredigezhel. Penaos avat e c'hallfe bezañ skarzhet ar bed buglelel krouet e-barzh an tiegezh, mar gra diouer ar benveg d'e skarzhañ ha da grouiñ en e lec'h ur bed gouroadel, ar vuhez kevredigezhel ? Aze emañ an arbenn eus diaesterioù

'zo gant ar gwim.

Un anadenn all zo da lakaat e kont, an hini hon eus anvet "anadenn an tre". An Emsav o vont war-raok a zilez doareoù-gwelout a voe talvoudus en ur mare, hogen a ve noazus mar befent miret, - da skouer, ar rannvroelouriezh a voe emsavel e 1919, ha n'eo ket ken hiziv : tre zo bet. En hevelep doare, tud 'zo a oa emsaverion er bloavezhioù pemont, er mare ma edo repuget an Emsav er stourm sevenadurel, zo aet er-maez eus an Emsav hiziv, - n'eo ket peogwir o defe dilezet ar mennoziou a oa o re neuze, met er c'hontrol dres peogwir int chomet stag ouzh ar mennoziou-se. Aes eo kompren pegen enkus ez eo anadenn an tre evit gwim 'zo : o zad zo chomet an emsaver-skouer, ar gouron ma oa evit o speredoù bugale, ha dic'houzañvadus eo dezho ar skeudenn a gavont anezhañ en Emsav a-vremañ. Mankout a ra dezho ar binvioù reiz a rofe dezho an tu da zezrannañ ar meizadur tiegezhel a viront eus ar bed ha da varn ergorek stuz politikel tud o ziegezh. Roll kevredigezh an Emsav a zle bezañ harpañ ar gwim da zont er-maez eus an enkadenn-se.

"Emaon o paouez lenn ur pennad gant MEMMI e-barzh e levr L'Homme dominé, a-zivout Kanadaiz c'hall. Dudius-kenan. Un notenn : "Ar skrivagner gall Morvan LEBESQUE a c'houlenn diganin, eme vMEMMI, komz eus "ethnie" kentoc'h eget eus "nation"... Respont a ran : an holl armoù zo mat pa vez anv a zieubiñ ar pobloù". Aze, a gredan, e tegasomp traoù un tammig solutoc'h, rak a-benn ar fin dieubiñ petra a fell d'an dieuberion-se ober ? Aon am eus ez eus dieuberion a vicher a ra an dieubiñ evit an dieubiñ evel ma'z eus arzourion a ra an arz evit an arz." (17 07 69) EMVR-90

E/EMVR-90. - Daveiñ a reomp hon lennerion d'ar pennad eus Emsav ma voe burutellet keal an "ethnie" ha dre vras an tezennoù naturelour er politikerezh : Emsav 18/172-179 EMVR-20. Lenn ivez Emsav 19/201-204 EMVR-26, Emsav 22/295-298 EMVR-38.

"Emaon o paouez adlenn an Ermaeziadeg [Sl. Emsav 30/170]. Ur frealz eo bet din, hag ur gentel, pa brederian war va saviad amañ () (XXIII,29-30) ha pa soñjan pegen g'rrek eo labour an Emsav." (22 07 69) EMVR-91

"Un abegadenn a santer bepred evel ur goulenn mut en daeloù pe en divizoù er mare-mañ. An Emsav ne hañval ket mont war-raok evit un darn eus an dud a zo en E.S.B.. Daoust hag ez ay gwelloc'h war-raok pa vo bet skarzhet an hini n'emañ ket a-du gant an dramañ-tra ? Petra a c'hell lakaat ac'hanomp da grediñ ez eo ret en em reizhañ diouzh ar gelennadurezh evit kas an Emsav war-raok ? Ne gav ket din e ve didalvoud distreiñ e Mur war vunudoù Istor E.S.B. hag an darempredoù en deus bet gant al ledemsav. Un dezrann zo da ober ivez eus an tezennoù difennet gant E.S.B. adal an derou. Soñjal a ran da skouer e Danevell S.A.D.E.D. evit ar Bloavezh-Skol kentañ, er rannbennad Renabliñ pergen. Meur a splet zo d'an dezrann-

se : 1) diskouez a belec'h e teuomp 2) lakaat war wel an hent a zo bet graet 3) displegañ an hent-se dre ar gelennadurezh. Un doare e vo da ziskouez barregezhioù ar gelennadurezh emsavel hag ivez barregezhioù an Emsav a zo deuet a-benn e ken nebeut a amzer da ober kement a hent (dipitus eo ne ve ket bet graet Istor kelennadurezh Breiz Atao evit keñveriañ)." (24 07 69) EMVR-92

"Anatoc'h eget biskoazh eo ivez hon eus da ziorren un divezouriezh emsavel en hevelep doare m'hon eus diorreet ur boellouriezh emsavel. D a felle dezhañ lakaat an Emsav da vont en-dro hep ren dezrann an diazezoù bedel ha trabedel, - lakaat a rae gwin nevez er seier kozh. Arverañ a rae, digudenn-kaer, ar skiantvoutin evel pa vije ar skiantvoutin-se un azez peurbadel da spered mab-den, ha n'eo ket skubion ar poellelezhioù diseurt o deus renet lerc'h-ouzh-lerc'h war Gornog abaoe ar Raksokrateion ha moarvat abretoc'h. Moarvat emamp o tiskar an divezelezhvoutin evel m'hon eus diskaret ar skiantvoutin ha dav eo dimp savelañ divezouriezh hon ober dispac'hel evel ma savelomp e boellouriezh. N'eo ket un trevell bihan.

"Pa'm eus lavaret da D e oa aze an diforc'h etre div brederouriezh, en deus distalet al lakadenn-se gant div arguzenn : a) n'eo ket prederouriezh da lakaat en afer-se (diskoulmoù pleustrek zo da gaout bepred, emezañ; arabat en em goll en damkaniezhoù) b) ar breud evel m'en renemp a dremene pell dreist penn an dud a oa eno (evitañ, ar preder a vez meret er-maez eus ar vuhez hag e klasker d'an eil e sankañ er vuhez, hep dont a-benn forzh penaos).

"Kement-se avat ne lak ket anat d'hon c'henemsaverion emamp dindan wask an ezhome da savelañ buan diazezoù an divezouriezh emsavel. N'eo ket gwir e tremen ar gudenn pell dreist o fenn, met gwir eo ne zinod ket c'hoazh diouzh donder o buhez betek o emouevaez. ()

"Daou wariadur a c'hellomp dezrannañ : a) an divezouriezh voutin, dizeriat, diemprat b) an arverelouriezh soviedel, a foeltr an daelerezh etre pal ha finvez.

"An divezouriezh voutin eo an diaesañ da zezrannañ peogwir n'eus anezhi nemet ur skubion divezouriezhoù : diemprat (divezouriezh ur gevredigezh diempret) eo ha da heul diempret ivez enni hec'h-unan. An tu hanezelour a zo enni he laka da welout ur mad peurvoudel hag un droug peurvoudel en oberoù an dud hep dave da finvez ebet (eviti, an distruj graet gant Moizez en Egipt ha, gwashoc'h c'hoazh, war ar poblañsoù pagan a gave Israel dirazañ ur wech kuitaet Egipt, zo torfedoù ha netra ken). An dud hep gwriziennoù istorek zo ganto-holl an hevelep tech treamzerelour : pouezañ an eneoù a reont. "X, emezo, en deus graet kalz evit Breizh ha steudenn ar ventel a dro war an tu muiel = arabat e deurel er-maez, se ne ve ket divezek". Ar personelezhioù n'o deus ket mon en Istor; ha Moizez e-unan zo bet diskarzhet : n'eo ket eñ en deus kaset Israel war brantad diwezhañ an hent da Zouar ar

Bromesa. Met an dud dres na fiziont ket war boell an Emsav a rank klask poelloù e lec'h all; ha petra diogeloc'h, evit ur gwel, eget ar poell a zo liamm diabarzh ur bersonelezh? Kehelouriezh ar bersonelezh, kevrinouriezh ar Sturier, gwengel ar Gouron zo frouezh seurt bedouriezh anistorek. Doue ra viro, n'omp ket barnourion war ar bersonelezhioù; rak poell hor buhez hiniennel n'emañ ket e bersonelezh un den all; an ere-diazezez etrezomp zo poell an Emsav, dibersonel, pe gentoc'h trafersonel, hag an doare d'e gaout da boell hor buhez eo an trehontiñ a rankomp ren dizehan etrezek ar gwirvoud (rak direizh e ve kaout ur poell trafersonel na ve ket war un dro trabeziadel, - met se zo ur chabistr all).

"Ar chabistr-se evelkent hon degas e-kefin an arverelouriezh soviedel, a glask rediañ an dud da gemer ur poell trafersonel met nann trabeziadel : o fazi n'eo ket bezañ anvet ha termenet ur pal, ar gomunouriezh, met bezañ graet eus ar pal-se ur finvez war un dro, ha sol o divezouriezh (divez = finvez). Diforc'hioù pouezus zo d'ober aze : bedel, beziadel eo ar pal dre dermenadur (dre c'herdarzh ivez, pal = bevonn, harz); savelañ ur pal zo enta labourat c'hoazh e kelc'h ar veziadelezh, en amgant ar bed; ar palioù zo dezho anvioù beziadoù : ar Stad vrezhon, ar gomunouriezh, Douar ar Bromesa. En enep, ez eo trabedel, trabeziadel ar finvezioù : trehontelezhioù int bepred; tennañ a reont da donkad mab-den (reizh eo lavarout : pal an Emsav, hag : ar finvezioù, finvezioù mab-den). Emzalc'h Soviediz er mare-mañ zo hemañ : paouezomp a drehontiñ, emamp tost d'ar pal. Aze emañ an drama, rak er mare dres ma tizher ur pal eo e tleer soñjal a-zevri en un trehontiñ nevez (setu perak ez eo startoc'h ar feiz komunour e-touez ar pobloù a zo pell a-walc'h diouzh ar pal evit ma chomfe c'hoazh warnañ liv ur finvez, eget e-touez Soviediz en gwel bremañ gant dremm dipitus ur beziad). ()

"Ne c'haller dremmañ ent wirion ouzh finvezioù mab-den nemet mar kemerer palioù gwirion; a-du-rall, n'eus nemet dre zremmañ ent wirion ouzh ar finvezioù ma c'haller savelañ un divezouriezh. An divezouriezh zo da zenelezh an emsaver ar pezh ez eo ar gelennadurezh politikel d'e emsavelezh." (25 07 69) EMVR-93

"Skrivañ a ra E en deus klevet un ezel eus E.S.B. o lavarout : "Seul grisoc'h e vo stad vevañ ar Vrezhoned, seul aesoc'h a se ne vo ken dimp klask ober dezho en em sevel ha setu perak ez eo arabadus ar 'rannvroeladur' a c'hallfe degas un tamm gwellaenn eus o stad". An dezenn-se n'eo bet difennet nepred gant E.S.B.. Dispennet eo bet evel-henn e-ser Devezhioù Studi Politikel Mur en hañv 1967. Daou fazi a ra ar re a zifenn an dezenn-se. Ar fazi kentañ zo kammañ an hanez rak n'eus skouer ebet eus un dispac'h gwirion a vefe c'hoarvezet er-maez eus ur prantad a ziorreadur armerzhel. An eil zo dianavezout petra eo anien an dispac'h. Ar gudenn evit an Emsav n'eo ket enkañ ar Vrezhoned, er c'hontrol, roll an Emsav zo dienkañ ar bobl vrezhon. An dra gentañ da ober war an hent-se

zo diskouez d'ar Vrezhoned ez int enket, ar pezh na oar ket ar bobl vrezhon. En un doare all e lavarer ez eo arallekaet ar bobl vrezhon hag e rank an Emsav kas war-raok an argerzh-diarallekaat a-benn lakaat ar Vrezhoned da emouezañ ouzh o arallekadur e-ser ur stourm emouiziek evit argas an arallekadur-se. Moarvat ez eus Breizhiz evit kavout gwell ur gevredigezh arallekaet eget ur gevredigezh en he rezid. Hogen kudenn an Emsav n'eo ket reiñ un diskoulm da gudennoù bredel tud 'zo. An Emsav zo ur vaezienn a wirionez : e roll zo lakaat ar bobl vrezhon en Istor ha da gentañ lakaat an emsaverion en Istor. Se a dalvez e rank an Emsav lakaat ar bobl vrezhon (ha pep emsaver) d'en em anavezout evel boud istorek ha da vuhezañ e istoregezh. N'eo ket dre zegouezh en deus roet R. HEMON an talbenn Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh d'e levr kentañ. Pazenn gentañ an dispac'h zo evit un den, evel evit ur bobl, en em anavezout hag an dra-se ne c'hell c'hoarvezout nemet e-ser un argerzh dispac'hel. Moarvat ez eo kriz an Istor ha gwall sammus darvoudoù an tremened, hogen an emsaver hag ar bobl vrezhon n'o deus nemet un Istor. Aesoc'h eo evel just klask diverkañ ar pezh a hañval displijus pe digalonekaus en Istor evel ma ra U.D.B. gant Breiz Atao, evel ma klaske ober ar Chouaned en o amzer : nac'h an devoud dic'houzañvadus a oa diskar o bed kravezel ha mervel kentoc'h eget talañ ouzh an darvoud. Hogen n'eus ket tu da c'hoari mouchig dall gant an Istor. Ar re a glask henn ober a vez flastret buan gant an darvoudoù, evel ar Chouaned, pe taolet en anistor, eleze lakaet dic'halloud dirak an darvoudoù hag ar vuhez. Istor an Emsav zo Istor ar bobl vrezhon. An hini na gemer ket perzh en Emsav ne gemer ket perzh kennebeut en Istor ar bobl vrezhon. Da heul ez eo divarrek da skoazellañ ar bobl vrezhon da zienkañ.

"Erziwezh d'an Emsav eo da reiñ o ster d'an darvoudoù ha da gemer e lec'h en Istor. Ne c'hell fiziout war netra estregetañ evit sammañ Istor ar bobl vrezhon ha kas war-raok an dispac'h. Ne c'hell ket dreist-holl fiziout war ar Stad c'hall evel ma klask lakaat da grediñ danvez sorserion 'zo a lavar e vo ret d'ar Gouarnamant (gall) plegañ a-benn ar fin ha lakaat ar brezhoneg er skolioù teir eurvezh diret ha rannvroelañ, h.a... N'eus nemet an Emsav a c'hell krouiñ ur gevredigezh e Breizh. N'eus nemet dre an Emsav e c'hell ar Vrezhoned bezañ lodek en Istor, Istor o bro hag Istor ar broioù all. Krediñ e teuy ar Vrezhoned da ziarallekaat dre un treuzfurmadur eus ar framm gall zo fiziout war ar Stad C'hall evit dienkañ ar bobl vrezhon. An dispac'h brezhon zo ar striv emouiziek graet gant ar bobl vrezhon evit distreiñ en Istor. Perak e rankfe an Emsav tremen dre ar skolioù gall pe ar skinwel gall evit komz d'ar bobl vrezhon ? Hag aon o deus an emsaverion da gejañ war-eeun, war an hevelep pazenn, gant o c'henvroiz ? Ar respont zo nann evel just evit an abeg eeun ma'z eo kroget an dispac'h e Breizh, peogwir ez eo kroget an Emsav da ziskar ar pezh a zo o vac'hañ ar bobl vrezhon (ar Stad C'hall hag ar gevredigezh vreizhat arallekaet) ha da sevel ar framm hag ar gevredigezh vrezhon nevez."

(27 07 69)

EMVR-94

DANEVELLOU OBEREREZH

Emvod hollek S.A.D.E.D. e Mur d'an 3 Eost 1969.

Danevell zo roet eus labour ar skolidi er Seizhvet Bloavezh-Skol e stumm sifroù : a) ar skolidi nevez (oc'h enrollañ evit ar wech kentañ er 7t B-S) zo bet kement hag an 33 % eus niver hollek an enrollidi, tra ma ne raent nemet an 8,5 % anezhañ er bloavezh a-raok b) oc'h echuiñ o bloavezh-studi ez eus bet 88 % eus ar skolidi nevez, ha 42 % hepken eus ar skolidi bet enrollet c'hoazh un pe lies gwech er bloavezhioù tremenet.

Kinniget ez eus sevel pevar rummad studi nevez : ur rummad Armerzhouriezh-I hag ur rummad Politikouriezh-I da vezañ lakaet war roll an 9t Bloavezh-Skol (1970-71); ur rummad Armerzhouriezh-II hag ur rummad Politikouriezh-II da vezañ lakaet war roll an 10t Bloavezh-Skol (1971-72). Degemeret eo ar c'hinnig. En doare-se e savo niver ar rummadoù studi da c'hwezek a-benn an 10t Bloavezh-Skol.

Degaset eo en-dro dirak Izili S.A.D.E.D. kudenn an darempredoù etre ar skolidi hag o reizherion. Meur a dezenn a zifenner lerc'h-ouzh-lerc'h : un daelerezh gwirion a zle bezañ etre ar skoliad hag e gelennerion; ar skoliad a rank kaout an tu da vurutellañ an doare ma vez barnet e labour, - d'ar Strollad neuze da gemmañ e zoareoù kelenn ha da wellaat e reizherezh; arskolidi a zle kaout ar gwir da zibab o reizherion. Degemeret eo da reolenn-stur : ar gwir o deus ar skolidi da abegiñ labour ar gelennerion; ar Strollad a gemer an disentezioù a zere da heul.

Divizet eo kenderc'hel gant reizhiad an notennoù dre sifroù. An notenn a dalvez d'ar skoliad d'en em savlec'hiañ en e araok-adennoù.

Renet ez eus ur vreuradeg a-zivout ar poelladennoù Lennegezh. Ha spletusoc'h eo d'ar skolidi plaenaat un destenn pe sevel un displegadenn war un oberenn, ur skrivagner, ur prantad eus al Lennegezh ? Er stad a-vremañ eus stummadur ar skolidi, ar pezh o deus ezhomm da zeskiñ dreist-holl eo lenn ar skridoù; anat eo kement-se war bep tachenn, ha pa ve politikerezh, lennegezh pe skridoù gouezoniell, an dud ne ouzont ket lenn. Setu perak ez eo talvoudusoc'h dezho plaenaat testennoù evit ar mare. A-hend-all, pal ar c'hentelioù Lennegezh n'eo ket kement stummañ skrivagnerion pe skridvarnourion ha ma'z eo deskiñ d'an emsaverion meizañ mat ar pezh a lennont ha dre-se perc'hennañ kevala speredel an Emsav. O vezañ ma chom dizingal liveoù deskadurezh ar skolidi ha diseurt o arbennikadurioù, e ve tu da reiñ dezho da zibab bep tro etre div boelladenn, unan aesoc'h o klotañ gant ezhommoù an deraouidi, unan diaesoc'h, arbennikoc'h, evit al lennegourion a vicher.

Meneget eo kudenn ar c'hoskor adarre. Hervez ar Reizhennoù kozh ez eus Izili eus S.A.D.E.D. na labouront ket er Strollad met en un aozadur all eus ar Skourr pe en ur skourr all eus E.S.B.. Ne vo reizhet ar gudenn-se nemet pa vo peurspisaet dezvad Izili E.S.B..

NOTENNOU POLITIKEL (7)

FRAMM AL LEVIEREZH

II. - AR FRAMMOU FETIS

En notennoù diwezhañ hon eus dielfennet al levierzh ha termenet al liammoù diseurt a zo etre e elfennoù. Bremañ e teskrivimp ar frammoù a c'hoarvez eus kenaoz an elfennoù-se evel m'o c'haver er bed.

1. - AR RENADOU HENVOAZEL

Diazezet eo ar renadoù henvoazel war an diforc'h klasel etre an arc'hwel-dezvañ hag an arc'hwel-erounit. Tri fatrom ez eus anezho hervez a) ma vez piaouet an daou arc'hwel gant un organ hepken, pe b) ma vezont fiziet e daou organ diforc'h ha kendizalc'h, pe c'hoazh k) ma vezont fiziet e daou organ diforc'h ha kevamzalc'h.

Renadoù henvoazel gant tolpadur ar galloudoù.

Keal tolpadur ar galloudoù

Lavarout a reer ez eo tolpet ar galloudoù pa vez an dezvañ hag an erounit e dalc'h an hevelep kreizenn-divizout. Daou zegouezh a ziforc'her hervez ma c'hoarvez ar greizenn-divizout-se eus un organ hepken pe eus meur a hini.

Tolpadur unorganel. En degouezh-mañ ez eus el levierzh un organ nemetken, o piaouañ an holl arc'hwelioù politikel : dezvañ, erounit, hag ivez peurliesañ an arc'hwel-barn. Organoù all ar Stad zo dezho ur roll kefridiadel hepken. Ur skouer splann eus tolpadur unorganel ar galloudoù a gaver gant unpenniezhoù ar Renad Kozh.

Tolpadur liesorganel. En dro-mañ ez eus meur a organ, - evit ur gwel rak isurzhiat int da unan anezho o piaouañ an aotrouniezh klok. Da skouer, isurzhiat strizh e oa d'ar Pennoù Stad Kambr ar Gannaded en Italia faskour hag ar Reichstag kenelwerinat, ha ne oa ganto an disterañ kentodusted. Ar furm-mañ a anver ivez tolpadur dre isurzh-iadur an organoù.

Ar renadoù fetis gant tolpadur ar galloudoù

Daou seurt renadoù a gaver hervez ma'z eo an organ tolpadour ar Gouarnamant pe ur vodadenn.

Tolpadur ar galloudoù gant ar Gouarnamant. Ent hanezel, ez eus daou renad er rumm-mañ : an unpenniezhoù diharzveli hag an diktatouriezhoù. En daou zegouezh emañ ar galloud etre daouarn un hinienn.

Dibaot-tre e kaver ar galloudoù tolpet e-ser ur poellgor. Ar skouer glasel eo Poellgor Salvder ar Bobl e Frañs, etre 1793 ha 1795. Renkañ a rafed amañ ivez ar renerezh-stroll pleustret en Unaniezh Soviedel.

Tolpadur ar galloudoù gant ur vodadenn. Ar "renad bodadennek" eo. Un danzead damkanel rik n'eus ken anezhañ avat : ne voe nepred kavet er pleustr, dre an arbenn kalvezel ma ne c'hell ket ur vodadenn embreger an holl c'halloudoù war-eeun. Dre ret e rank savelañ un organ-erounit, poellgor pe hinienn, ha fiziout ennañ kefridioù ar gouarn. Da heul, ent damkanel emañ an organ-erounit e dalc'h klok ar vodadenn a c'hell e freuzañ e pep mare; ent devoudel avat, ar Gouarnamant-se a c'hounez bepred beli a-walc'h evit bezañ ur greizenn-divizout dizalc'h, a-walc'h zoken a-wechoù evit mestroniañ ar vodadenn en krouas. Evel-se ez emdroas ar Convention c'hall, - a veneger alies evel ur renad bodadennek, hag a gouezhas buan neoazh dindan veli ar Poellgorioù.

E gwir, ar strolladoù dehou eo a hej spontailh ar renad bodadennek a-benn krennañ war gourbrientoù an Dael. En enep, ar gomunourion a sav a-du gant ar renad bodadennek, pa fell dezho korvoiñ hengoun dispac'hel ar Jakobined c'hall a ra eus an Dael fiziadour riegezh ar bobl, - braslun henezh o reiñ dezho an tu da savelañ diktatouriezh ar Strollad Komunour dindan neuz ur vodadenn riek.

Renadoù henvoazel gant rannadur ar galloudoù.

Keal rannadur ar galloudoù

Emplegañ a ra ez eus oc'h ober al levierezh lies organ arbennikaet pep hini en embregerezh ur galloud.

Arbennikadur arc'hwelel. Peurliesañ emañ an arc'hwel-dezvañ e piaou un Dael, hag an arc'hwel-erounit e piaou ur Gouarnamant. Pep organ a gefleugn greadoù e arc'hwel, hag holl c'hreadoù un arc'hwel a vez kefleuniet gant un organ hepken : an Dael, da skouer, ne ra nemet dezvoù hag an holl zezvoù a vez graet gant an Dael.

Dizalc'hted organel. Ar strizharbennikadur-se ned eo ket a-walc'h. Dizalc'h rik e rank bezañ pep organ diouzh ar re all, - eleze, ned eo ket an Dael evit gwerediñ war ar Gouarnamant nag a-c'hin. N'eus gourbrient ebet gant an organ-dezvañ e-keñver an organ-erounit : ne gemer ket perzh en anvadur ar vaodierned, n'emañ ket gantañ ar gwirgoulenn na -devennañ, ha n'o deus ket ar vaodierned atebegzh politikel dirak an Dael. Diouzh e du, an organ-erounit n'en deus ket gwir da vont tre en Dael, na galloud war an esteziou, na gwir-loezañ. Emañ an disparti klokañ etre an daou organ.

Ret eo lavarout ne gaver ket er fetis ur c'hendizalc'h ken klok etre organoù hag etre arc'hwelioù al levierezh. Zoken en degouezhioù a rannadur strishañ, e vez an organ-dezvañ o kemer perzh en arc'hwel-erounit war dachenoù ar c'hellidsteuñviñ hag an diplomatarezh, hag an organ-erounit oc'h emellout en arc'hwel-dezvañ dre ar galloud-devedañ (Emsav 31/222,224). Ouzhpenn-se e vez an eil organ o werediñ war egile : dre argerzhadur an "impeachment", ar gouarzh goursezus, kentodiñ an dezvañ, h.a.

Ar renadoù fetis gant rannadur ar galloudoù

Ar rannadur hon eus deskrivet a glot ouzh an disparti empennet gant LOCKE ha MONTESQUIEU. Evel m'hon eus merket c'hoazh, amboaz an damkanourion pe an embregourion a erbedas disparti ar galloudoù oa krennañ war veli an organ kreñvañ eus ar mare, ha pellaat ur renad aotrouniek.

An unpenniezh bevennet. E grez an unpenniezhoù diharzveli eo e tinodas tezenn rannadur ar galloudoù : empennet e voe gant eneberion ar renad evel an tu da wanaat beli ar Roue. An Dael, savet a-dal d'an Unpenn, a ziframme digantañ un darn eus e c'halloudoù, ar galloud-dezvañ. Evit mirout ouzh ar Roue a skrapañ ar galloud-se en-dro, ne veze lezet gantañ araez-gwerediñ ebet war an Dael.

En darn vuiañ eus broioù Europa, ez eus bet evel-se ur furdremen etre an unpenniezh diharzveli hag ar renad daeliek, a zo bet an unpenniezh bevennet. Berzh-mat ar gredenn e riegezh ar bobl zo deuet a-nebeudoù da greñvaat beli an Dael diwar goust hini ar Roue, ken ma ne voe ket ezhomm ken en diwezh da wareziñ an Dael dre un disparti ken krenn. En enep, gant lamadur an disparti-se e kav an Dael an tu da greskiñ he gourbrientoù, evel ma welimp.

Ar renad leviourek. Er Stadoù-Unanet ez eus bet sevenet ur furm all a rannadur ar galloudoù, o reiñ pouez kevatal d'an dezvañ ha d'an erounit. A-dal d'ar C'huntell (Congress) pe Dael amerikan, piaouer ar galloud-dezvañ, emañ ar galloud-erounit e kerz al Leviour, dilennet, evel ar C'huntell, gant ar vroad a-bezh, ha dizalc'h diouzh ar C'huntell.

Daou azon a verk ar renad leviourek : 1) dilennet e vez Penn ar Stad gant ar bobl ha n'eo ket ezholet gant an Dael 2) nag al Leviour, nag ar vaodierned dibabet gantañ ne c'hellont bezañ dizornet gant an Dael, dre ur vouezhiadeg a zisfiz da skouer. E-se en deus al Leviour ur pouez dreist e politikerezh ar riez. Dav eo lavarout ez arc'hwel distroñs ar renad leviourek abaoe 170 vloaz er Stadoù-Unanet. Ned eo ket strizh ennañ rannadur ar galloudoù. Al Leviour a biao ur gouarzh goursezus war an danvez dezvoù mouezhiet gant ar C'huntell. A-hend-all, e kenlabour unan eus an div vodadenn, ar Sened, gant ar Gouarnamant war greadoù-erounit 'zo. Ouzhpenn-se, kempouez a zeu diwar frammadur kevreadel ar riez da veli dirveur al Leviour.

Drevezet e voe ar reizhiad amerikan gant riezoù Suamerika, nemet e tenn ar renad leviourek da zisneuziañ eno : tennañ a ra al Leviour da vestroniañ an Dael ha da savelañ un damziktatouriezh.

Furmoù henstuzel eus rannadur ar galloudoù.

E demokratiezhoù an Henved e veze ivez dispartiet ar galloudoù : diforc'het e veze ar c'hefridiouriezhoù (magistratus) diouzh Bodadenn ar Bobl. An daoubennelezh (Emsav 30/179) a oa he fal ivez gwanaat gourbrientoù an daou genroue pe an daou gonsul. E Roma, e piaou tribuned ar werin (plebes) edo gwir an intercessio, anezhañ un doare gouarzh, a roe dezho an tu da enebañ ouzh ar Gouarnamant.

E Republikoù brientinel ar c'hêrioù e dibenn ar Grennamzer (e Firenze da skouer) e veze rannet, bruzhunet zoken, ar galloudoù.

E Frañs, an Directoire (1795-1799) a oa un unkor (Emsav 30/179) a bemp ezel o piaouañ ar galloud-erounit. Daoust ma veze dilennet an unkorourion (directeurs) gant ar bodadennoù, n'o doa an daou organ araez-gwerediñ ebet an eil war egile. Fall-kenan ez arc'h-welas a-hend-all ar renad-se.

Kevamzalc'h ar galloudoù : ar renadoù daeliek.

Gant tri c'heal pennañ eo azonet kevamzalc'h ar galloudoù :

- 1) diforc'hadur arc'hwelioù al levierezh, fiziet en organoù distag
- 2) kedarc'hwel etre an organoù-se, eleze tachenoù arc'hwelañ boutin
- 3) etreweredoù etrezo, pep hini o kaout en e gerz araezioù da werediñ war egile. E berr, kempouezet eo rannadur ar galloudoù gant ur c'henlabour arc'hwelel hag un dalc'hiadegezh organel.

Er pleustr ez eo enkorfet kevamzalc'h ar galloudoù gant ar renadoù daeliek, - a zo seurtoù niverus anezho.

Amañ e ranker resisaat : kement renad a zo ennañ un Dael ned eo ket dre ret ur renad daeliek. Ouzhpenn bezañs un Dael e rank bezañ : a) kevamzalc'h ar galloudoù b) rannadur ar galloud-erounit etre daou vlein : ur Penn Stad hag un Tevezvod, hemañ o vezañ atebek dirak an Dael. Erziwezh ez eo atebegezh ar vaodierned dirak an Dael an azon ret eus ar renad daeliek.

Ar renad daeliek klasel

Gant tri azon ez eo merket ar renad daeliek klasel : 1) daou-vleinded ar Gouarnamant 2) dibouezded ar Penn Stad 3) ar c'hempouez etre beli an Tevezvod ha beli an Dael.

Daouyleinded ar Gouarnamant hon eus studiet c'hoazh (Emsav 30/178-180).

Dibouezded ar Penn Stad. Hemañ ne c'hoari roll politikel ebet, lakaet er-maez dibab an Tevezeg, - ha c'hoazh alies n'en deus frankiz ebet d'ober e zibab, da skouer pa n'eus er vro nemet daou strollad kenurzhiat gant pep a vleiniad. Ne gemer diviz ebet : eilsinet e rank bezañ e holl c'hreadoù gant ur maodiern, hemañ o vezañ atebek warno dirak an Dael. Anatebek eo ar Penn Stad. Ent wirel en deus galloudoù bras, ent devoudel beli ebet.

Kempouez ar belioù hon eus studiet c'hoazh p'hon eus gwelet an araezioù o deus Dael ha Gouarnamant da werediñ an eil war egile (Emsav 30/187-192).

Ar renadoù orleanour, weimarel, gaollour

Ent furlmel ez eo ar renadoù-se patromoù-tremen etre an unpenniezh bevennet hag an daeliegezh klasel. Ganto n'eo ket aet dibouez Penn ar Stad c'hoazh : gourbrientoù en deus miret.

An daeliegezh orleanour. Evel-se eo bet anvet peogwir e voe diorreet dindan ren tiernac'h (1) ORLEANS e Frañs en 19^t kantved. Ar maodiern GUIZOT, an damkanour anezhi, a lakae e tle an Tevezvod kaout war un dro fiziañs an Dael ha fiziañs ar Roue. Hervezañ, "an tron ned eo ket ur gador c'houllo".

An daeliegezh weimarel. Bonreizh alaman Weimar (1919-1933) a savelas ur renad a denne d'ar renad orleanour e keñverioù 'zo. Klask a rae kreñvaat ar galloud-erounit dre greskiñ beli ar Penn Stad republikan. Heñvelderioù oa gant ar renad leviourek. Ul lev-ezon vras en deveze ar Penn Stad dre an arbenn ma veze dilennet war-eeun gant ar bobl. Gwir en doa da zizornañ e vaodierned, zoken p'o devoa fiziañs an Dael, - kontrol oa an diferadenn-mañ da reolennoù an daeliegezh klasel. Gwir en doa ivez da loezañ an Dael, ha da zavedañ dezvoù hep goulenn aotre an Dael.

Er pleustr avat, n'en deus ket bet ar renad-se an disoc'hoù gortozet. E-lec'h kreñvaat ar galloud-erounit, en deus e wanaet. Ar vaodierned hag an Tevezeg, gennet etre an Dael hag Arlevier ar Riez n'o deus bet na levezon na stabilded. Dinerzhet e voe ar renad ouzhpenn-se gant loezadurioù niverus.

An daeliegezh c'haollour. Bonreizh c'hall 1958 a zegasas ur seurt nevez a renad daeliek heñvel a-walc'h ouzh an orleanouriezh; kreñvaat a rae roll Penn ar Stad, o reiñ dezhañ daou c'halloud nevez : ar gwir d'ober engalv dirak ar vro dre boblaters, ar gwir da embreger un diktatouriezh dibad mar beze reuzioù grevus; da lakaat ouzhpenn ar gwir da loezañ an Dael hep eilsin maodiernel.

Ne veze ket dilennet Arlevier ar Republik war-eeun gant ar bobl; ne oa ket aotreet kennebeut da zizornañ an Tevezvod keit ha ma vire hemañ fiziañs an Dael.

Ar Vonreizh azgwelet eus 1962 a zivizas e ve diwar neuze dilennet Arlevier ar Republik dre ar mouezhiañ hollek, ar pezh a nesae ar c'haollouriezh d'ar renad weimarel. Forzh penaos, edo pell an embreg diouzh an damkan : evit gwir e voe kreizennet ar vuhez levierzhel gall en-dro da LE GAULLE, arwarzhekañ Arlevier he deus bet ar riez c'hall. Eñ a gemere e-unan an disenteziou a bolitikerezh uhel, o lezel gant an Dael hag an Tevezvod an emell eus ar c'hudennoù standur.

Ar renadoù daeliek digempouez

E nep lec'h ne vez kavet an daeliegezh klasel en arver. Ar renadoù daeliek oc'h arc'hwelañ hiziv er bed zo holl digempouez : gwech ez eo an Dael a zo dreistpouezek, gwech ez eo ar Gouarnamant.

Renadoù daeliek gant dreistpouez ar Gouarnamant. Ar wellañ skouer eo ar renad breizhveurat. Ennañ e tremenas ar veli eus ar Gurunenn d'an Dael hag eus an Dael d'an Tevezvod. Frouezh emdroadur ar strolladoù politikel eo an eil tremen-se.

An daoustrolladegezh ha kenurzh diabarzh pep strollad a zisoc'h da dolpañ an holl c'halloudoù etre daouarn an Tevezeg, bleiniad ar strollad muianiverek en Dael. Dre an hevelep arbenn n'eus riskl ebet evit an Tevezeg da vezañ diskaret gant ar gannaded. Ne vez nepred enkadennoù tevezvodel, ha ne vez ket engalvet ken atebeged ar vaodierned. An hevelep tra evit al loezadur : n'eus ket ezhomm anezhañ evit gwaskañ war an Dael; arveret e vez hepken da zegas dilennadegoù er c'houlz gwellañ evit ar Gouarnamant.

An Dael e Breizh-Veur he deus kollet pep galloud da enebañ ouzh ar Gouarnamant. War goazhañ ez eo aet war un dro he galloud-dezvañ : 90 % eus an danvez dezvoù breutaet ganti a vez kinniget gant ar Gouarnamant. Ul leurenn n'eus ken anezhi ma c'hell an eneberezh reiñ e vouezh da glevout, ma c'hell tezennoù bras ar politikerezh kenstourm, ma c'hell ivez al lazioù prevez ha lec'hel bezañ difennet.

Renadoù daeliek gant dreistpouez an Dael. Gant an drede hag ar bevare Republik e Frañs e voe skouerioù eus ar seurt-se a zaeliegezh.

He c'havout a reer dre vras e kement lec'h ma vleugn al lies-strolladegezh. O vezañ ma ne c'hell strollad ebet kaout ar muianiver en Dael drezañ e-unan, e rank ar Gouarnamant kemer harp war ur yuzh, eleze ur c'hevredad a strolladoù pe a c'hronnadoù, bresk

dre natur, ha bec'h en deus dre-se o virout ur muianiver a-du. Dav eo dezhañ plegañ bepred mui pe vui da arc'hadurioù ar gannaded. E dalc'h an Dael emañ ar Gouarnamant, hag un organ gwan ha distabil ez eus anezhañ. Zoken p'en deus ar gwir da loezañ an Dael, en deus diegi ouzh henn ober, bepred evit na feukañ ar gannaded, - tra ma c'hell an Dael diskar an Tevezvod dizamant-kaer.

2. - AR RENADOU ARNEVEZ

Evit doare n'eo ket bet dilezet patromoù henvoazel an daeliegezh. Anv a glever bepred gant ar Wask, er c'helc'hioù politikel, eus renad daeliek, renad leviourek, renad bodadennek. E gwir, ar beziadoù arnevez ne glotont ket mui gant hevelep anvadoù, met diegi o devez ar bolitikerion o tilezel ar braslunioù kozh hag o tegemerout ar patromoù arnevez. Ar re-mañ a studiimp bremañ.

Ne vo ket souezhet al lenner oc'h adkavout amañ lod eus ar renadoù hon eus studiet evel "renadoù henvoazel". Renadoù henvoazel 'zo zo aet da get. Ar re all o deus padet, oc'h emdreiñ avat, ken e ranker, evit meizañ an hevelep renad e daou brantad eus e Istor, ober gant patromoù disheñvel : ar patrom henvoazel a ro da gompren arvezioù 'zo, met arvezioù all ne gomprenet nemet gant skoazell ar patrom arnevez.

Un elfenn nevez zo o treuzfurmiñ politikerezh ar Stadoù abaoe pemont vloaz : ar strolladoù politikel. Ken e lakaer bremañ an diforc'h-diazez, n'eo ket mui e-keñver rannadur ar galloudoù, hogen e-keñver niver ar strolladoù politikel a zo er vro. Komz a reer eus renadoù unelour (unstrolladek pe anstrolladek) hag eus renadoù lieselour (daoustrolladegezh pe liesstrolladegezh).

Ar renadoù unelour.

Ar patrom heverkañ anezho eo ar renad soviedel, diazezet war ur strollad unel unvloc'hek. Stummoù all ez eus koulskoude.

Ar renadoù unelour strizh

Er rumm-mañ e renker ar renadoù unstrolladek sonn evel ar renad

soviedel, hag ar renadoù anstrolladek a c'haller meizañ evel furmoù henstuzel eus ar re gentañ.

Ar renadoù unstrolladek sonn. Danzeet gant LENIN ha MUSSOLINI ez eo ar strollad unel nevezadenn vras an 20^t kantved a-fet framm al levierezh. Gantañ e kemm penn-da-benn ster an dilennadur, pa laka ur reizhiad unezholel e-lec'h furmoù gwerinek dibaberezh al levierion. E-keñver piaouerezh ar galloud ez eo ken klok-all ar reverzhi : tolpet eo an holl c'halloudoù etre daouarn ar strollad unel. A-wechoù ez eo divizet tolpadur ar galloudoù gant ar Vonreizh; a-wechoù all e tifer ar Vonreizh ur rannadur gwirel eus ar galloudoù, - ent devoudel avat e chom an holl c'hourbrientoù e piaou ar Gouarnamant, eleze e piaou renerion an unstrollad.

En Unaniezh Soviedel ned eo organoù al levierezh, - maodierned, Penn ar Stad, Dael, amaezhierion, - nemet araezioù-greadiñ embraget gant ar Strollad Komunour. Kreizenn-luskañ gwirion ar riez zo poellgor-leviañ, Prezidiom, ar Strollad : pouezusoc'h eo ar Prezidiom eget an Tevezvod. E penn ar riez eo bet STALIN hep titl estreget an hini a Sekretour Meur ar Strollad.

Ar renadoù anstrolladek. Ar furm arnevez eus ar renadoù unelour eo an unstrolladegezh. Ar furm henstuzel anezho a gaver gant ar renadoù hep strollad politikel, anstrolladek. O stummoù boasañ eo an unpenniezh kozh hag an diktatouriezh personel. Renadoù ar broioù isdiorreet int, re zistuz o foblañs evit mont en ur stern politikel. Alies e tro ar renadoù anstrolladek-se e renadoù unstrolladek.

Ar renadoù damunelour

Etre ar renadoù unelour hag ar renadoù lieselour ez eus furmoù-tremen a c'haller envel renadoù damunelour, - diazezet int war ur strollad unel frammet gwevn, pe war ur strollad trec'hel.

Ar renadoù unstrolladek gwevn. Ar strolladoù unel sonn ne c'houzañvont ket ma tiwanfe en o c'hreiz na tuadoù na darnadoù - bodadoù izili unanet dre an doare o deus da veizañ ar gelennadurezh. An holl a rank plegañ d'ar reizhkredenn ha handeet garv e vez an

darnouriezh. Unvloc'hek int, hag unelour rik a-fet kelennadurezh.

Padal ez eus strolladoù unel oc'h asantiñ betek ur poent d'al liesegezh diabarzh. Degemerout a reont an tuadoù evel hentoù da brientiñ an disentezioù kevredin. Skouerioù a strolladoù unel gwevn zo gant ar Strollad Komunour soviedel e grez LENIN, gant Strollad Republikan ar Bobl diazezet e Turkia gant Mustafa Kemal ATATURK, - a dalvez da batrom d'ar broioù isdiorreet.

Ar renadoù pennstrolladek. Ent furlmel ez eus renadoù liesstrolladek anezho, nemet unan eus ar strolladoù zo kalz kreñvoc'h eget an holl re all a-gevret, eleze an anvad a strollad trec'hel a roer dezhañ, ha derc'hel a ra ar galloud en e biau. Feurliesañ ez aotre d'an eneberezh kinnig emstriverion en dilennadegoù, emellout en Dael, embreger frankizioù foran, - met d'an deiz ma tiviz ar strollad trec'hel lemel an aotreoù-se digant ar strolladoù kevezer, n'eus beli ebet gouest da herzel outañ. Ar renadoù-se, kavet alies a-walc'h er broioù isdiorreet, a denn da emdreñ etrezek ar furl unstrolladek.

Ar renadoù lieselour.

Lieselour a reer eus ar renadoù-se peogwir ez int diazezet war lies strollad politikel, hevelep ma n'eus hini ebet anezho kreñv a-walc'h evit mestroniañ ar re all. Meur a seurt ez eus eus ar renadoù-se. A-raok o deskrivañ e te zrannimp an elfennoù a gemerer sol warno evit o renkañ.

Elfennoù-diazeze renkadur ar renadour lieselour

Niver ar strolladoù. Hervez niver ar strolladoù politikel e reer anv a liesstrolladegezh pe a zaoustrolladegezh.

Al liesstrolladegezh a vir ouzh ar Gouarnamant a gemer re a veli. Dibaoat a wech e c'hell unan eus ar strolladoù bezañ muianiverek en Dael. Da heul en deus ar Gouarnamant ezhomm eus skoazell strolladoù all evit tizhout ar muianiver. E-se e vez distabiloc'h er renadoù daeliek, hualetoc'h er renadoù leviourek.

En daoustrolladegezh emañ harpet ar Gouarnamant war ur Strollad nemetken : stabiloc'h eo a se hag efedusoc'h. Atebekoc'h eo ivez.

Er Gouarnamant diwar yuzh er renadoù liesstrolladek, e tenn pep strollad da zisteurel war e genyuzhidi kiriegezh ar c'hwitad-enoù. Pezh na c'hell ket ober ar strollad gouarnamantel er renadoù daoustrolladek : ret eo dezhañ bep tro sammañ bec'h e fazioù hag e zroukverzhioù. A-du-rall, er stourmad dilennel e oar pep hini eus an daou strollad kevezer e vo rediet marteze da seveniñ e bromesaoù. Hevelep endalc'h n'eus ket anezhañ el liesstrolladegezh hag eno e c'hell ar strolladoù grataat forzh petra, dinec'h-mat pa ouzont e kavint bepred an tu da deurel ar bec'h diwarno.

Framm ar strolladoù : daoustrolladegezh start pe laosk. Ar renadoù-dave er c'heñver-se eo an hini saoz hag an hini amerikan.

En Dael vreizhveurat ez a pep strollad d'ober ur gronnad stabil, e izili o sentiñ strizh bepred en degouezhioù a-bouez. An diazez eo seurt kenurzh da stabilded ha da veli ar Gouarnamant. Ar c'hannad a nac'hfe mouezhiañ hervez an divizoù kemeret a vefe diskarzhet eus e strollad.

Ouzh an daoustrolladegezh start-se ez eneber an daoustrolladegezh laosk : er C'huntell amerikan e vouezh pep derc'houezour, pep senedour hervez e zibaboù personel, hep goulenn ali e strollad. Dre-se, da geñver pep mouezhiadeg e kemm al linenn-disrann etre muianiver ha bihanniver ha ne glot ket peurliesañ gant linenn-disparti an daou strollad Republikan ha Demokrat. Komz a reer a vuianiver fiñvus.

Mar seller ouzh an heuliadoù politikel, ez eo nesoc'h an daoustrolladegezh laosk a batrom amerikan d'al liesstrolladegezh eget d'an daoustrolladegezh start a c'hiz vreizhveurat. Heñvel a-walc'h ouzh hini an Tevezeg gall eo saviad al Leviour pa fell dezhañ lakaat mouezhiañ ul lezenn gant ar C'huntell : dav eo dezhañ pleustriñ an Dael gant aked ha pasianted a-benn daspugn ur muianiver. E gwirionez, e rank al Leviour kemer harp ivez war ur yuzh, - n'eo ket ur yuzh a strolladoù, met ur yuzh a hinienoù, puzuilhoc'h hag amjestroc'h ober outi eget ouzh unan a seurt all.

Furm ar renad e-keñver Bonreizh : levioure pe daeliek. An eneb-

adur renad leviourek / renad daeliek ne c'hell bezañ priziet nemet ur wech kenaozet gant an enebadur all renad daoustrolladek / renad liesstrolladek.

Al liesstrolladegezh nag an daoustrolladegezh laosk ned eont ket mat en-dro er renadoù daeliek : devoudañ a reont distabiled ha diefedusted ar Gouarnamant. En enep e klot mat gant ar renadoù leviourek : eno ne c'hell ket bezañ un arvar evit hoali ar Gouarnamant.

En enep, e tere an daoustrolladegezh start ouzh ar renadoù daeliek evit a sell diogeliñ stabiled ar Gouarnamant.

Mar seller bremañ ouzh ar renadoù leviourek, e verzer ez eo amjestr an daoustrolladegezh start ganto. Lakaomp e teufe al Leviour hag ar muianiver en Dael eus an hevelep strollad, ez afe ur veli kalz re vras gant ar Gouarnamant. En degouezh kontrol, mar befe al Leviour eus ur strollad hag ar muianiver en Dael eus egile, e vefe sac'het arc'hwel ar Gouarnamant, ha dic'hallus e ve dezhañ leviañ.

En enep, e tiskouez ar vuhez politikel amerikan e klot ervat an daoustrolladegezh laosk ouzh ar renad leviourek : ar Gouarnamant a gav an tu d'ober e labour, bennozh da verusted ar strolladoù, da fiñvusted ar muianiveroù, zoken pa ne zeu ket al Leviour hag ar muianiver en Dael eus an hevelep strollad.

Tri fatrom ar renadoù lieselour

Ar renadoù leviourek zo diazezet war an daoustrolladegezh laosk, er Stadoù-Unanet, pe war al liesstrolladegezh, e riezoù Suamerika. N'eus diforc'h ebet etre an div reizhiad evit a sell ouzh frammadur al levierzh. Un diforc'h bras ez eus avat e-keñver dilennadur al Leviour : diouzh an tu e vez un dibab fraezh etre daou emstriver, diouzh an tu all un didoueziañ dispis etre meur a hini.

En daou zegouezh e tiogel al leviouregzh ur Gouarnamant stabil, ha kreñv a-walc'h daoust da vreskted ar muianiveroù.

Dav eo d'ar Gouarnamant ren ur c'hoari soutil gant an Dael, a-benn he lakaat da vouezhiañ danvez dezvoù pe ar c'hellidsteuñv.

Gourdon e rank bezañ war bleustr ar muianiveroù fiñvus : disheñvel e vez ar muianiver war ur gudenn gellidel diouzh ar muianiver war ur gudenn skolel ha diouzh ar muianiver war ur gudenn diplomatel.

Ar renadoù daeliek gant daoustrolladegezh start zo diwar ar patrom breizhveurat, - anezho an dominionoù hag ar Republik Kevreadel Alaman. Gant an daoustrolladegezh start e vez treuzfurmet doareoù ar renad daeliek klasel : tolpet emañ an holl c'halloudoù etre daouarn an Tevezeg, a zo war un dro bleiniad ar strollad muianiverek. An ereoù kefridiel lakaet gant an daeliegezh etre galloud-dezvañ ha galloud-erounit a steuz a-dreñv un ere nevez kalz kreñvoc'h : an ere muianiverel, a laka etre Gouarnamant ha Dael ur genstageded seul startoc'h ma vez an hevelep tud o piaouañ ar veli en eil hag en egile. Seurt tolpadur eus ar galloudoù a gemer lec'h ar c'hevamzalc'h kempouezus deskrevet gant an damkanourion glasel, - kevamzalc'h kempouezus ha n'eus anezhañ e renad daeliek fetis ebet.

Ar renadoù daeliek gant liesstrolladegezh a gaver e riezoù kevandirel Kornog Europa (nemet er Republik Kevreadel Alaman) hag e Japan.

Eus an holl renadoù lieselour ez eo ar re a arc'hwel ar gwashañ. Azezet war yuzhoù dizunvan a denn bepred d'en em zizober e vez ar Gouarnamantoù distabil ha gwan. Ne c'hellont ket embreger pleustr ar muianiveroù fiñvus evel er renadoù leviourek : darev e vez bepred ar yuzhoù d'o dilezel ha da dreiñ a-enep dezho. O freder pemdeziek ha pouezusañ eo mirout o muianiver : dav eo dezho en em reiñ mui pe vui d'an trokellerezh (2) gant izili an Dael, - ar re-se a rankont gounit kentoc'h eget o dilennerion. Komz a reer eus "entroadur" (3) politikel al leviererezh daeliek, hag aze emañ moarvat an namm grev-usañ eus ar renadoù liesstrolladek.

Padal e ranker anzav ez arc'hwel gwelloc'h ar renadoù-se er broioù bihan, e Lec'hleñn hag e Beneluks, eget e Frañs, Italia pe Japan. Ha se moarvat peogwir ez eo aesoc'h da ziluziañ ar c'hudennoù politikel er riezoù bihan, - ha peogwir ez eo brasoc'h ar genurzh e diabarzh ar strolladoù politikel, ar pezh a ro tu da aozañ yuzhoù

startoc'h ha da zerc'hel muianiveroù stabiloc'h.

Kenglotadur etre patrom ar framm levierzhel hag an doare ma tibaber al levierion.

Ar renadoù unelour zo, dre vras, renadoù aotrouniek. Hag ar renadoù lieselour renadoù gwerinek.

A-du-rall, an diforc'h etre an tri fatrom a renadoù lieselour a glot gant an diforc'h savelet etre gwerinelezhioù dihanteradek (Emsav 29/145) ha gwerinelezhioù hanteradek. Ar renadoù leviourek hag ar renadoù daoustrolladek daeliek a laka dilenn penn al Levierzh war-eeun gant ar bobl : gwerinelezhioù dihanteradek int. Ar renadoù daeliek liesstrolladek ma vez ezholet Penn ar Gouarnamant gant an Dael zo gwerinelezhioù hanteradek, - arc'hwelañ fall a reont peurliesañ.

-
- (1) Tiernac'h b., heuliad tierned eus an hevelep kerentiezh, rummad roueed.
 - (2) Trokellañ v., ren darempredoù kuzh, steuiñ troioù-pleg, kavailhañ, a-benn tizhout aesoc'h ur pal. Trokellerezh g., pleustrerezh an trokellañ.
 - (3) Entroadur g., termen arveret gant ar bredoniour JUNG evit merkañ stad an den o plediñ muioc'h gant ar pezh a dremen ennañ e-unan eget gant ar pezh a dremen en-dro dezhañ; e yezh ar politikerezh e talvez ar ger da venegiñ an tech o deus strolladoù, aozadurioù da blediñ muioc'h gant o obererezh diabarzh eget gant un ober en diavaez. Ko.: eztroadur.